

CHANSON NEVEZ

DAOU DEN YAOUANK DEUS A GAER MONTROULEZ

VAR EUN TON GALLEC

AR GOAS

Bonjour va douç, va c'harante
Deut hon gant gwir humilite, (bis
Da laret did kenavo,
Hon deut aman, hon deut aman,
Da servicha au drapo,
Mont a rankan breman.

AR PLAC'H

Oh ! Louis va muia karet,
Mervel a rin gant poan speret,
Asables ganit breman,
Me a iëlo. me a iëlo,
Birviken did ne vankan.
Beteg eur ar maro.

AR GOAS

Oh ! Marivon va dousik coant
Te ne deui ket d'ar regiment.
Cals re eus a dourmanchou,
So er brezel, so er brezel,
Barz en toëz ar souffrançou,
E teufes da vervel.

AR PLAC'H

Ma vefe red din brezelli,
Me rofe plom da enemi,
Me ziscoëlfe ma c'hourach,
En creis an tan, en creis an tan,
Vin ket plac'h treitour na lach,
Da denna prussian.

AR GOAS

Va mestres ker en kreis an tan,
Evit eur plac'h so re a boan,
A gant trous ar c'hanolliou,
Teufes bouzar, teufes bouzar,
A gant nerz a mitrailloù,
E cwfes d'an douar.

AR PLAC'H

Ma ne c'han da vrezelli,
Da renta fas d'an enemi,
Me a vo cantinieres,
Er regiment, er regiment,
Me a ranko mont ganet,
Evel gwir plac'h vaillant.

AR GOAS


Neuze ta va douç, Marivon,
Quitefomp on daou or c'hanton,
Ben eun neubeudic amzer,
Gant gras Doue, gant gras Doue,
Din a retorno d'or gaer,
D'or bro, a d'or c'hontre

AR PLAC'H

Ben eun neubeudic amser,
O' ia Louis ma gouir serviger.
Ma halon a vezo zeder,
Pa vin hez compagnunez
Bars en armé, barz en armé,
Mo quet tristiguez
O tremen ma buez.

Partiet in d'ar regiment,
O daou gant eur galon gontant,
Da servicha an drapo,
Int partiet, int partiet,
A betek eur ar maro,
Vefont fidel hepret.

Cetu aze va minionet,
Daou den a nem garie parfet,
Oh ia bars en honestis,
A barfetet, a barfetet,
Gret evelthe yaouankis,
Bezit fidel hepret.



RÉGIMENT AR MERC'HET YAOUANK

1006
401

VAR EUN TON GALLEC

1^{er} couplet.

Bremam memeus clevet,
Vo gret eur regiment
Ag enn'hi vo choaset,
An oll merc'het vaillant,
Da vont d'ober brezel.
Var an ennemiet,
Betek vo red mervel,
Vefont fidel bepred.

DISCAN.

Passeit merc'het vaillant,
Bremam eur bragou ru.
Da vont da regimant, (bis)
Vefet galvet dustu.

2^e couplet.

En plaç ho robennou,
Danvez deuz ar c'haëra ;
C'hui a po eur bragou,
Deus meser ar grossa,
En dro d'ho corfou ;
C'hui po centurennou,
Ho taoulagat lirzin,
Oute neuze vrillo.

3^e couplet.

Ho pleo hir a pendet,
En demeselet coant,
Bremam a vo troc'het,
Vel guir soudart vaillant,
Ag en lec'h ho coëfou,
C'hui po casquetennou,
O deo codardennou,
Ah ive eur ponpon.

4^e couplet.

En plaç ho potinou,
C'hui po eur boutou gros,
Vit heuil an armeou,
Couls en de vel en nos,
Evit en em c'holo,
O po eur gapoten,
Onnes va dec'h rayo,
Pa vo an amzer a yen.

5^e couplet.

Deus ar merc'het coanta,
Certen e vo choaset,
Er c'hargou huella,
A da gabitenet,
Ar re vo disket mad,
A vo er burayou,
Eno vefont erfad,
O c'heuil an armeou.

6^e couplet.

Ar merc'het teo a lard,
Vo er gavailliri,
Ag an oll merc'het stard
Vo en artilliri,

Vit galoud remoi,
Ar pesiou canolliou,
D'ober d'an enemi,
Cals deus ho boulijou.

7^e couplet.

Ag ar broderezet,
Vo er voltigerien,
Ar guemenerezet,
A vo bars e linen,
Er chassourien var droed,
Vo ar merc'het ar gamp,
Blamour int délikat,
Ag eur wes elokant.

8^e couplet.

Da vont en hussardet
Ar goeginerezet,
Ebars an dragonet,
Vo ar quiguerezet,
Merc'het ar pinsoniou,
A vo er soavet,
Er butun so kelou,
Vont infirmierezet.

9^e couplet.

En infantiri marin,
Ar baperezet,
Er c'honseil disciplin,
Ar re deo meritet,
Da vont er saperien,
Ar merc'het terrupla,
Envel deus archerien,
A vo er pen kenta.

10^e couplet.

Pen ar regimanchou,
Bremam e vo laket,
Gant an taboulinou,
Ar guiderezet,
Ag ar stamerezet,
A vo er c'hlairioniou,
Dre m'in corfou ezet,
En penn d'eus au troupou.

11^e couplet.

Vit zon ar musikou,
Ar grampoëzerezet,
O c'heuil an armeou,
A vo brao da welet,
Ag an ostizezet,
Gant ho ardou malin,
A vo cantinierezet,
A werzo dour vit guin.

12^e couplet.

Cetu aze merc'het,
Evidoc'h eur c'hélou,
Cals ac'hanoc'h me gred,
A vo trist ho ginou,
Pa vo ret dec'h monet,
Da heuil ho pataillon,
Bezit fidel bepret,
Evit an nation.